

Elections législatives
10 et 17 juin 2012



Janick MORICEAU
Jean CATHALA

7^{ème} circonscription du Finistère
DOUARNENEZ / PONT L'ABBE

[<http://janickmoriceau2012.fr>]]



Itron, Aotrou,

E-giz eil-prezidantez Kuzul Rannvro Breizh e-pad c'hwec'h bloaz, em eus savet diazezoù politikerezh-mor hor rannvro. Gouzout a ran ar pezh a c'hellfe ur mor gwarezet, degas d'hor bro ha da implij ar re yaouank : ur peskerezh padus, gounid ar bezhin, eko-bageal, tretañ gouelezennoù ar porzhioù, energiezhioù ar mor. Diskoulmoù a zo evit echuiñ gant an enkadenn, sevel ur gevredigezh reizhoc'h, un ekonomiezh da grouiñ labour a zoujo ouzh an dud hag ouzh an natur. **Bevañ gwelloc'h asambles, posupl eo !**

Adlakaat budjed ar stad en ur stad reizh e c'hellomp ober o stourm a-enep ar foraniñ hag ar finañoù bras a za re bell anezho, • gwellaat goproù ar re vunut, skoazell ar re gozh, • kemm al labour-douar da wareziñ ar beizanted, an natur hag hor yec'hed, • diorren hentenoù nevez er sevel-tiez, en energiezh, • adsevel ar servijoù foran, krouiñ hini ar vugaligoù, • sevel skol an doujañs an eil evit egile d'hon bugale d'ober berzh ganti, hag a-benn ar fin, reiñ ur statud d'ar brezhoneg !

Embann a ran e zougin ar chanterioù-mañ ganeoc'h hag evidoc'h. D'an 10 a viz Even, roit d'ar brasañner nevez, nerzh ha digoradur al liested, votit evit ho soñjoù :

Grit ganeomp, choaz an ekologiezh !

Janick Moriceau

Evit taliñ ouzh emdroiñ an ekonomiezh hag ar sokial, e c'hellomp ijinañ ur bed all, evit mont er maez eus un doare mont endro produelour hag a ziskar al liammoù etre an dud evit lakaat war-raok gounidoù ur minorelezh, lakaat diaes an dud, beuziñ ac'hanomp gant ar bruderezh, freuziñ an natur ha teñvalaat dazont hor bugale. Daoust m'eo bet trec'het an tu dehou da-geñver an dilennadegoù prezidant, e rankomp memes tra mont pelloc'h bremañ, o tilezel an nerzh nukleel sivil ha brezel, o chench al labour douar, oc'h adneveziñ tachenn ar skolioù hag ar yec'hed. O votiñ evit an ekologiezh politikel, e c'helloc'h reiñ muioc'h a bouez war an tabutoù ha divizoù da zont, er parlamant nevez hag er gouarnamant a vo savet diwarnañ.

Jean Cathala